

INSTRUCTIONOU VAR AN EVESSAOU GENERAL DA GUEMER EN AMZER AR G'HOLERA.

Ar C'holera a zo en Paris : dre ma elfe éruout en Breiz, e meus sonjet, evel er bloavez 1832, sqigna etouez va c'henvroïs divar ar meaz, an Instructionou amañ varlerc'h, pere a dleän da vadelez an Autrou BRISSTOT-THIVARS, Prefet ar Finister. Eürus ma ellont tizout da eur vad benac.



Ar soignou qen util en peb amzer evit conservi ar yec'hed, a deu, dreist oll, necesser en amzer-rën ar c'hlénvejou pere a dac calz a dud.

Ret eo delc'hel prop an tyes elec'h ma zeus c'halz a dud o cousgat. Rêi ar muia sclérijen d'ar c'hamprjou, ha caout soign, bep mintin, da zigueri ar prénestou, evit rîi ear vad ha chasseal an ear fall : arabat eo gouscoude rîi re vras ear en eun tol, nac en em delc'hel-vis-a-vis da eur prénest digor a vez dirac eun nor digor ive, rac aoun da drapout yenien.

Na eller recommandi re da zerc'hel eun ty prop ha sec'h. — Ret e vezou eta nettât ervad, nonpas hepken

coll. Jean Henn.

vardro an tyes, mes c'hoas ar c'hourtjou, an antreou hac ar gommoditeou; laqat scrabat lodennou al leurenty hac ar vuraillou pere a vez sclabezet eus a loustoni, entanez da réi c'hoez fall; laqat goalc'hí, mar deo ret, pe gant dour, pe memes gant dour clor, an andrejou fléryussa eus an tyes, ha laqat güenna ar vuraillou gant râ, hep sabl, pa zònjer e vez convenabl en ober.

Ret e vezo miret pe pellât, ar muia possubl, eus an tyes, an teil hac al louzaou o vreina; laqat redet an dour sac'h en em gav vardo an tyes, ha dele'hel prop ar voaziou dour, ar marchossiou hac ar c'hreyer, hac ouspen ze, miret na chommo an anevalet er memes campr gant an dud.

Ar vezventi, hac an direizdet en peb tra, a zeblant disposi d'ar c'hlénved, hac en renta danjerussoc'h.

Arabai eo qemer aoun; ar speret calm, ar gourach hac ar gonfianç eo an dispositionou güella a enep ar spont eus ar c'holera, courz evel ma zeo an temperanç hac ar reizdet en oll habitujou eus ar vuez ar re favorapla en pere ec'h alfet en em gaout evit blanqât pe tec'hel ouz e attacou.

Ar boued e zoar custum da zébri; hac eus a bere en em gaver ervat, a zo atao mad: ne vez qet mad chençh a fêçon da vêva, var digarez caout güelloc'h boued.

D'ar medecin eo da c'houzout petra da ober.

Ret eo dreist oll diwoal da eva re a-win-ardant.

Evit ar pez a zere eus ar güiscamant, e zeo mad en em c'holo gant eun eubeut muioc'h a eyes eguet na rafet en eun amzer ordinal. Mad e ve douguen bouteyer coad pe galochou, evit delc'hel tom an treid hac o goarantissa eus an humidité.

Eun tam tan en eur gambr a zo calz yac'hus, hac a burisi an ear en eur bellât an humidité.

Ar c'holera neo qet eur c'hlénved bossennus : ne draper qet aneàñ o tarempredi nac o touch ar re glân ; ellout a râr , eta , hep itep aoun , gemer soign eus ar re o deveus ezom.

Da zezirout e vez , goude ar pez a zo bet examinet epad ar c'holera eus ar bloavez 1832 , e vez roet mad gémentse da gredi d'an oll , evit na ve qet dilezet an dud attaqet eus ar c'hlénved . dinjan an aoun vrás da veza abandonet er momentchou nécessera .

An experianç a zisqez penos , epad ar c'holera , e veler calz a dud o santout certen diezannant ; gementse néo qet ar c'holera , gouscoude e zeo ret atao laqat eves , querent m'en em santer jenet .

Cement hini a zanto poau en e estomac , en deve ar c'holica , pe red-côf , a dleo , qent peb tra , ha pa na ve qet mêmes bras ar mercou-ze , douguen eun eves bras var ar seurt boued a zêbr , ha diminui ar gantite , pe mêmes en em briva en antier , hervez an ezom ; tlcout a rai tec'hel euz ar fatic , euz ar yenien hac eus an humidite , en em vouisca tom mad , laqat eur centuren flanel endro d'ar c'hôf , evit pellât ar muia possUBL ar yenien demeus al loden-ze eus ar c'horf , hac éva eur vech an amzer eur banne *the* , *soj* , *meliss* (louzaouen air galon) , *camomill* , *hillo-douar* , *menth* , *till* , an eil pe éguile . — Al louzaou-ze a gaver er c'hæriou , en stalliou an apotigerien .

En gen cås ne dremenfe qet buan an indisposition , ne dleer qet caout aoun da c'hervel eur medecin .

Ma ne deu qet ar voyenou merget amân diarog da arréti ar boan , mar cuntinu ar c'holica , mar cresq ar boant , ha dreist oll , mar teu an dislounca , pe mêmes mar teu ar mercou-ze en eun tol , e vezò ret d'an hini clân mont dioc'h-tu en eur güele tom , entre tapissou gloan ; placi briquennou tom , sac'houigou bian a drêz pe sabl tom , pe boutailladou dour tom eus e dreid ;

applica serviedou tom var e gôf; frotta e vemprou gant eun tam flanel, trempet e güin-ardant camphr; rîi da eva, bep anter-heur, the camomill; laqât digass tomder da blant an treid, dre voyen cataplamou bleud lin, en pehini e vezò laqet eun nebeudic bleud moutard; miret ouz peb yénien, ha rîi eul lavamant bian gant dour riz, amidon, pe col-malo, da bere e vezò ajoutet dour eur penn roz-qy. Guelloc'h e ve, ma ne else qet an den clân derc'hel al lavamant, rîi dean eun eilvet pe eun drivet, qentoc'h eguet rîi en ur vech eul lavamant antier, pehini a vé, marteze, supportet gant poan.

D'an ampoent, ma teu ar mercou eus a bere e zeus comzet amân diarog d'en em unani eus a boân benn, eus ar glazic er memprou, ar yenien var eul loden vras eus ar c'horf, mar teu yen an iéod, an daoulagad anter-clozet ha droue-livet, ar c'hoc'h var ar visach ha var an daouarn da denna var ar glas, ar mercou-ze er c'hlénved na dleont qet miret eus a implich ar voyenou hon eus merget; ret eo o implija gant hast vras, da c'horios ma vêzo éruet ar medecin.

Ret eo eta tomma ar c'hlânvour, ha cuntunui hep héana an implich eus ar voyenou merget amân diarog, bete ma vezor deuet a bepn da brodui an domdér naturel, pehini eo ar merq eus eur güellaen favorabl.

Miret da eva bièr pe gist ne vent qet grêt avoâlc'h, na débri fruez criz epad rên ar c'hlénved.

D'an ampoent qenta-mâ e zeo eta ret absoluament confia soign eur c'hlânvour da eur medecin : ar voyenou da laqat en implich, adalec neuze, ne apparchantont nemet d'ar medecin : inutil, ha memes danjerus e ve rîi nep instruction er poent-se eus ar c'hlénved, pere ne vent qet comprehenet pe a else beza appliqet fall.

Imprimet gant Approbation an A. Prefet.

Montroulez, e ty LÉDAN, Imprimer, e traòn ru'ar Vur.